

8N3-1-017



DOUE HA BREIZ BEPRED



## BELEG DA VIKEN



WAR DON : *Elez eus ar baradoz.*  
PE DON : *Kelven.*

I

Eus an Arvor, ar menez, diredet gant dudi,  
Kanomp hirio da Zoue, kanomp e veuleudi.  
Eun deiz kaer evel heman, deiz eun ofer'nn nevez  
A zo eun deiz a vennoz paret war eur barrez.

**Diskan :**

Bennoz, bennoz d'eoc'h Jezuz, ha mil gwech trugarez  
Evid an enor dispar ho peus graet d'hor parrez  
O tont enni da zibab hag enni da c'helver  
Unan eus he bugale da vont ouz hoc'h aoter.

II

Evid ober eur beleg. — Doue d'ar vadiziant  
A verk gand e zourn santel ar bugel zo d'e c'hoant ;  
Ha dre ma kresk en oad, e skiant, e furnez,  
Aked Doue warnezan a gresk ive bemdez.

### III

Evit ober eur beleg, — Doue d'ar bugelig  
A laka eur vamm gristen e tal e gavelig,  
Eur vamm a oar luskellat ervat he bugale  
E karantez ar Werc'hez, e karantez Doue.

### IV

Evit ober eur beleg, — Doue gant plijadur,  
Abred a ro da glevet e c'halv d'ar c'hrouadur ;  
Hag ar bugel dibabet, sentus ouz mouez Doue,  
A lavar a greiz kalon ; « D'eo'h oun korf hag ene. »

### V

Neuze, tennet eus ar bed, eo laket er sioulder  
Hag ar bedenn ar studi, pell a vez e breder...  
Eun deiz, deiz a levenez, e weler war e benn  
Dourn an Eskop astennet... Beleg eo da viken !

### VI

Skuilhit, Jezuz, ho pennoz war ho peleg yaouank ;  
Laoskit warnan ho krasou da redék puilh ha stank...  
Ar beleg eo ho kannad, mignon hon eneou,  
Ho peus karget d'hon hencha betek porz an nenvou.

### VII

Ar beleg en e zourn zakr a zoug alc'houez an nenv.  
Gand e gomz, hon ene klanv a deu nerzus ha krenv.  
O burzud dreist pep burzud ! d'e gomz Jezuz zoken  
Eus uhelder an nenvou, davedan a ziskenn.

### VIII

Ya ! Jezuz, krouer pep tra, Jezuz, prener ar bed,  
Jezuz gwir Vab an Hini, n'eus warnan mestr elbet,  
Ouz komz nerzus ar beleg bemdez a zo sentus  
Hag a zisken eus e lez war e c'her burzudus.

### IX

Santez Mari, mamm Doue, rouanez Breiz-Izel,  
Roit d'hor beleg yaouank, ho pennoz, ho skoazell.  
E garg a zo dem-henvel, Gwerc'hez ouz hoc'h hini :  
Grit ma kendalc'ho bemdez da zantelât enni.

### X

Ha c'houi, sant Paol benniget, eus bar skedus an nenv (1),  
Harpit ho peleg yaouank, —ho prec'h deoc'h c'houi zo krenv, —  
Ma c'hello war ho roudou, pell warnezho kerzet,  
Ha skuilh sklerijenn ar feiz, ho peus d'eomp digaset.

(1) *Pe, mar deo ar beleg yaouank eus a vro Gerne :*

Sant Korantin benniget, eus bar skedus an nenv.

J.-M. PERROT,

Gwelet ha kavet mat evit beza moulet a nevez.

Quimper, ce 12 Juin 1921.

P. MESSAGER,  
Vic. gén.